

## Nag en tu-all da Bariz...

Nag en tu-all da Ba - riz, Nag en tu-all da Ba - riz, Nag en tu-all da Ba - riz, Nag en tu-all da Ba - riz, Ez eus eur plac'h yaou - ank, Far - li far-laon o bim, bañ baoñ, Ez eus eur plac'h yaou - ank, A - lo far la ri de\_\_\_ no.

II

En deus daou, tri amourous (*4 gvech*)  
 Me oar he zantimant,  
*Farli farlaon o bim, bañ baoñ,*  
 Me oar he zantimant,  
*Alo far la ri deno*

III

Ar c'henta zo keginer,  
 An eil zo paotr a gambr ;

IV

An trede a zo kere,  
 Kere boutaouer-ler,

V

Hag en deus grêt eur boutou,  
 Demeus a ler lijer.

VI

Ha pa oa grêt ar boutou,  
 D'o c'has gêr eo ét.

VII

'N eur ésea ar boutou.  
 Dezi en deus laret :

VIII

« O, me garje, koantennig.  
 Be' ganez dimezet ».

*Dastumet en Hanveg, 1950.*